

Stagaden « Kroaz ar Vretoned » Ar zul an 10 a viz Kerdu 1905.

## PENSE AN « HILDA »

E koun ar Vretoned o deuz  
kollet o buez ouz rec'hel Sant-  
Malo, e nosvez euzus ar zadorn,  
18 a viz Du.

WAR DON : *Jezus, Salver adorabl pe Silvestik.*

Euz-a Vro-Zaoz e teuent graet o bloaz ha laouen,  
Yaouank an darn anezo, lod bugale zoken ;  
E kov al lestr-tân *Hilda* e kanent an distro :  
Euruz nep 'n euz ket ezom da vont kwit euz e vro !

Etre roched ha kroc'hien, goazed penn-a-vandenn  
En o gouriz lér kaled a gloze aour melen,  
An aour-ze hag a dlie trei lugern e beziou  
E bevanz hag en eurvad da galz tiegeziou.

Rag edo deut evilo koulz ar beilhadennou,  
An diskwiz e korn an tân, hag ar c'hontadennou ;  
Ha meur a hini yaouank a dride 'n eur zonzal  
Edo evit an eured o douz oc'h o gedal.

E kreiz eun deuvlijen ken dtu hag an ifern  
E kruz mouez vraz an avel hag ar mór a dregern ;  
Ezel al lestr a orjel gant an larziou : n'euz forz !  
Eur sturier mad o devez hag ema tost ar porz.

Mez kerkent eur strakaden : Petra 'zo ? Petra 'zo ? ...  
Eun mestled a lavar 'n eur noden 'bion d'zo.

Eur paotr yaouank a Gleder an doa bet an eurvad  
Da c'hellout ouz ar rec'hel gant kalz a boaj pignat,  
Pa glevaz ouz e c'hervel e vreur bihan e traou,  
Hag hen lammet d'e zikour... Beuzet int bet o daou.

Tud keiz, war-nez da lakát o zroad ouz douar Breiz,  
Edo neuden o c'haloun o tridal en o c'hreiz,  
Ha setu ma sank enno kildent eur roc'h garo :  
O mousc'hoarz a zo sklaset gant droukliv ar maro.

C'houeac'h hebken o deuz gallet kavout o zamm buez ;  
Ouspeun kant a zo choumet er mor doun da c'hourvez,  
An darnvuia Bretoned ! O breudeur, mar gallfemp  
Rei eur pok da vibana d'ho tal, d'ho pleo distrem !

Paourkeaz relegou kollet, mar gallfed ho kavout,  
Mar gallfed monet hebken hed a hed war ho roud,  
Gant pegen braz levez e vijec'h dastumet !  
Gant pegen braz karantez e vijec'h briatet ?

Hogen ar mor 'n euz lazet ha dalc'het ho korfou,  
N'hall, ker kreuv ma 'z eo, laza na derc'hel hoc'h  
[eneou.

Ar feiz a yoa 'n ho kaloun, feiz stard ar Vretoned :  
Eur beden war ho tiweuz c'houi a zo tremenet.

Beza e oant kristenien hag oll kristenien vad,  
Labourerien Plouezoc'h, Sibiril, Plouescat,  
Re Blouzevede, Cleder, Roskoff ha Plouenan,  
Re Gastel, Treflez, Plougoulun ha re Dreflaouenan.

Rag edo deut evito koulz ar beinaqennou,  
An diskwiz e korn an tãn, hag ar c'hontadennou ;  
Ha meur a hini yaouank a dride 'n eur zonjal  
Edo evit an eured o douz oc'h o gedal.

E kreiz eun denvalijen ken du hag an ifern  
E kroz mouez vraz an avel hag ar mór a dregern ;  
Ezel al lestr a orjel gant an tarziou : n'ezuz forz !  
Eur sturier mad o deveuz hag ema tost ar porz.

Mez kerkent eur strakaden : Petra 'zo ? Petra 'zo ? ...  
Eur martolod a lavar 'n eur redeg 'biou d'ezo :  
« Ar stur ! aet eo kwit ar stur ! » Hag an oll da devel,  
Ar spount o kregi enno, hag an oll da zevel.

Al lestr paour a dec'h breman, distur, gant e frouden.  
Ha da beleac'h o c'haso gant herr e redaden ?  
Euz e bost, ar c'habiten hen dinec'h da welet  
A gemenn eun dra bennag ha ne c'haller klevet.

Henvel ouz eun tenn kanol eur youc'haden a zao :  
« Rec'hel ! rec'hel en hon raog ! » KerKent, en dour-  
[bill c'hlaou,

Eur stok spountuz ha safar hag an daouarn en ear,  
Hag eur galvaden, unan, divent e kreiz ar barr !

Piou a lavaro biken ar c'hemmesk, an drubuilh  
Hag ar stourm araog mervel en tarziou o tiriuilh ?  
Ouz tammou koat, er gwermiel, en deleou a yud  
Ema krog gant o ivin evel eur brankad tud.

Oll, o nerveunnou stegnet, o lagad digor braz,  
En eur grena gant anoued, gant terzien ha gant glaz,  
E c'hedont sikour na deu... A damm dre damm bep  
[eur,  
Ar brankad a rouesa, n'ezuz gour abarz nemeur !

Hogen ar mor 'n euz lazet ha dalc'het ho korfou,  
N'hall, ker kreuv ma 'z eo, laza na derc'hel hoc'h  
[eneou.

Ar feiz a yoa 'n ho kaloun, feiz stard ar Vretoned :  
Eur beden war ho tiweuz c'houi a zo tremehet.

Beza e oant kristenien hag oll kristenien vad,  
Labourerien Plouezoc'h, Sibiril, Plouescat,  
Re Blouzevede, Cleder, Roskoff ha Plouenan,  
Re Gastel, Treflez, Plougoulm ha re Dreflaouenan.

Marz eo nag en doa fizians en e Vamm euz an neac'h  
An den yaouank a gevjot chapeled ouz e vreaç'h ;  
Hag hounnez a yoa ivez eur plac'hik a galon  
A skrivaz araog mervel : « Va breur, ped evidon ! »

Euz strad o linsel finvuz e c'houlenn an ananon,  
Eur c'horn-douar benniget, kãn Iliz ha vaskaon,  
Hag ar mór gant pizoni a zilouuk ouz an aot  
Korfou blonset gant an tarz ha morliv o dioujod.

..

Eur gwall-reuz peurliesa pa zispak e graban,  
Pa zailh gant e zremm euzus, ne deu ket e-unan :  
An eil tarz-mór a beurc'hra labour an hini kent ;  
Gant skei, ec'h had an Ankou hirnez, goelvan, skrignu-  
[dent !

D'ar c'houlz ma tlier tanva bara mad ha dudi  
Setu n'ezuz 'met dienez ha kaon ebarz peb ti,  
Ha pegeit eo da badout ho reuz, ho naoun, mamun  
[geaz ?  
Ar paotr a c'hello gounid 'zo war ho parlen c'hoaz.

Ha te, den koz daoubleget, piou harpo da gozni ?  
Piou 'glozo da zaoulagad en-berr pa dremeni ? —  
Eat eo da vuia-karet, plac'hik, eat eo d'anaon ! —  
Intanvez da zeitek vloaz, gwisk da vantel zu-kaon !

Ar mor epad pell amzer a darzo c'hoaz en aot,  
Avel ar meaz en teven pell c'hoaz a zuilho geot  
Ha siouaz pell pell ivez e talc'hint beo envor  
Ar gwall-bense tud yaouank ha raun-galoun Arvor.

An daoulagad entanet n'o deuz mui a zaelou,  
Ar c'hlemvan a zo torret : e doun ar c'halonou,  
Ar c'heuz, trouz ebet gantan, en em zilet a-ruz,  
A grign kig beo ar gouli dre zindan hag e-kuz.

A bell, me 'gav d'in gwelet an nozvez beilhaden,  
Ouz taol, an tamm boued debret : na grik na mik  
gant den ;  
Daou, tri skaon a zo goullo, skanvior ar c'hez anaon,  
Ar re vihan ne gredont sellet outo gant aon.

An oll 'zo pleget o fenn ; er meaz, eur gaouad c'hlo...  
Hag oll ez eont a spered da rec'hel Sant-Malo,  
E doare pelerined beteg eur bez santel,  
Hag eno sioul, heb finval, e choumont diskabel.

Ha kredi a reont gwelet evel d'ar zadorn noz  
An *Hilda* gant mor diroll o tonet a Vro-Zaoz ;  
Gwelet a reont an dispac'h, ar flastr, an tremenvan,  
Hag ar c'hoirvou a stribilh abarz koueza dindan.

Hag ar galv, ar youc'haden, an luni diveza,  
He c'blevet a reont skiltruz... Hag an tad koz 'n e za  
Trumm da rei sikour... Siouaz ! Hag lien divorfla  
Hag en em welet er gear ha diroll da ouela !

Setu aze, Kristenien, stad ho kenvroiz keiz !  
M'ho ped, en hano Doue hag hon bro ger a Vreiz,  
Na nac'hit ket rei d'ezo skoazell hoc'h aluzenn,  
Ha kas 'vit o re varo da Zoue ho pedenn.

GLANMOR.

**GOULENN** en ti an O. Jaffrennou, evit 2 wennek,  
nouellou moulllet gant otheadur an eskopti ; eul levrik a  
zo deuz ar bravan.

# MAM AR MARTOLOD



*Ma mab a zo bet kol-*



*let war ar mor ar bla man Bi-*



*ken ken na vo ka-vel tra le pred hen fela*



*ran.*

Ma mab a zo bet kollet war ar mor er bla-man ;  
Biken ken na zo kavet, ha bepred hen klaskan.

Bep beure, e-tal an ôd, me ya 'vit hen kavet ;  
Me hen goul gant an mor don : ar mor na respont ket.

Me ya da gorn ar vered 'lec'h eo beziet ma zud ;  
Me hen goul gant an douar : an douar a chom mud.

Nag ar mor nag an douar n'o deuz d'in respontet.  
O Doue ! na welin ken ar mab am euz ganet !

C'houi 'poa, Gwerc'hez truezus, korf ho mab da bokad,  
Hag eur be ho poa ive 'n ho kichen d'hen lakad.

Pa vin ét deuz ar bed-man, ma c'herent, me ho ped,  
Na douget ket ma c'horf paour e-unan d'ar vered.

O ! Douget ma c'horf d'ar mor, an de ma vin maro,  
Eno, na hir 've an hent, hon daou ni 'n em gavo.

DIR-NA-DOR.